

C'HOUEZ VAD AR ROZEN

Andantino.



Enn e - zen-nig a ne-ve am-zer A ga - ne dis-par en de-



liou, Eun heol drant a gi - ni - ge se - der Mous-c'hoarz



e di-we - an bau - nou. Pe-gen dous e-touez ar bleu-niou, El liorz-



man leun a gaer - der, Leun a gaer - der, dont da



chi-laousiou-der ar mae-ziou A gomz d'ar ga-lon ken te - ner, Dont da



chi-laou sioul-der ar mae-zlou, A gomz d'ar ga-lon ken te - ner.

Eun ezennig a neve amzer
A gane dispar en deliou,
Eun heol drant a ginnige seder
Mousc'hoarz e diwean hannou;
Pegen dous e-touez ar bleuniou,
El liorz-man leun a gaerder — leun a

Dont da chilaou sioulder ar maeziou | *diou*
A gomz d'ar galon ken tener | *wech*

Peuc'h ar zerr-noz, elec'h Ievenez
A lede war ma hunvreoù
Eur vorennig a dristidigez,
'Vel koumoulen skanv au oablou;
Ma zell a bare, ankeniet,
War eur rozen liou dispar — o liou dispar!
He deliou flour hanter-bulluc'het | *diou*
A gouez poanuis d'an douar. | *wech*

He c'houez dinerz, 'vel klemm eur c'hlanvour,
'A gane sioulik d'am ine,
Eur c'hleangan dous, truezus ha flour,
Luskellerez a garante...

« O bugel, chilaou ma c'homjou,
Ma mouez skuiz a c'houl tevel — a c'houl | *tevel;*

Hogen, c'hoant em eus, daoust d'am | *d'am*
Rei d'it eun ali kent mervel | *foaniou, diou wech*

« Eveldout, e tougis eur pennad
Gened dispar ar yaouankiz;
Kinnig a ren puilh d'an daoulagad
Kaerder, koantiri ha drantiz;
Mes ma dudiusan gened,
Ma enor da virviken — da virviken,
Eo ma c'houez pur evel ar glanded, | *diou*
Ha tener evel eur c'hlizen. | *wech*

Ar gened-ze a strink ken skedus
Eus neve-amzer da vuhe,
D'ar beure ken heo ha ken lintrus,
'Benn zerr-noz 'vo goenvet ive;
'Vit kavet ar gened gwirion,
A bado keit ha Doue — keit ha Doue,
Grez ma teulo rozen da galon | *diou*
C'houez ar furnez, ar garante! | *wech*